





# An Elez hag ar Bastored




An noz ste - re - den - net a zo sioul ha yen,



E kê-rik Beth - le - em eo kous-ket peb den;



Gant o den-ved war ar run, ar Bas - - to - red,



Holl ne - met ar ge-dour noz a vo red.

## I

An noz steredennet  
a zo sioul ha yen,  
E kêrik Bethleem  
eo kousket peb den;  
Gant o derved war ar run  
ar Bastored  
Holl nemet ar gedour-noz,  
a vored.

## II

Kerkent eur sklerijenn  
kaer evel au deiz  
A darz hag a zihun  
ar vesaerien geiz.  
Hag e welont, spontet holl,  
eun êl gwenn kann  
A zo skedussoc'h eget  
an heol splann.

## III

Hag an êl a lavar :  
n'ho pet aon ebet.  
Dont a ran da zigas  
kelou mad d'ar bed :  
Eur Zalver zo ganet deoc'h  
e ker David,  
Hên eo ar C'hrist, an Aotrou,  
Ah ! savit.

## IV

Savit trum, mesaerien.  
it buhan d'e gaout ;  
Setu eun arouez  
evit en anaout :  
Eur c'hraou a vezo e di,  
hag ar bugel  
N'en do nemet eul laouer  
da gavel.

Ha raktal e tregern  
an oabl gant ar c'han,  
Meuleudi an êlez,  
d'ar bugelik gwan  
A zo brenin (1) an Nenvou,  
ha mab Doue  
A c'hede pobl Israel  
da roue.

Setu ar Bastored,  
poulzet gant ar feiz,  
A red da Vethleem  
heb gortoz an deiz;  
Hag e kavont ar bugel  
nevez ganet,  
War ar plouz, krouer ar Bed  
astennet.

VI

VIII

An Elez a gane  
dudius ha krênv;  
D'an Aotrou hon Doue,  
Gloar e barr an Nenv,  
Ha d'an holl dud a youl vat  
war an douar;  
A berz an Holl-C'halloudek.  
poc'h, trugar.

Neuze, o taoulina,  
ar vesaerien baour,  
N'o deu da ziogeter  
nag arc'hant nag aour,  
A ginnig da Vab Doue  
o c'halon barr  
A garantez evitan,  
prof dispar!

GWENNAEL.

(1) brenin = prince. Cf. brenn, Brennus

IMPRIMATUR

Quimper, le 20 Décembre 1934,

P. JONCOUR,

Vic. gén.